

D'an 23 a viz Du

- War-dro ar bloaz 97, merzherenti sant Klemes Iañ, pab, trede warlerc'hiad sant Pêr. «Gwelet en doa an Ebestel, eme sant Irenaios, hag e oa bet e darempred ganto: o frezegezh a zassone c'hoazh en e zivskouarn hag o labourioù a oa c'hoazh dirak e zaoulagad.» Da gristenion Korintos e skrivas ul lizher a ro un testeni prizius war frammadur urzhaz an Iliz ha damant eskob Roma ouzh an holl Ilizoù. Da vare heskinadeg Trajan e voe harluet e Krimea hag eno e voe taolet er mor gant ur maen ouzh e c'houzoug. E gorf a voe degaset da Roma gant ar sent Kurilloz ha Metodios da vare Adrian II.

- War-dro 164, da vare Antoninus, merzherenti santez Felisite a Roma, intañvez. Hag hi uheliadez gonezet d'ar feiz e voe flatret gant beleion pagan ha kondaonet d'ar marv war un dro gant he seizh mab he doa desavet e doujañs an Aotroù. Aspediñ a reas Doue evit kaout ar c'hras da chom hep bezañ lazhet a-raok he mibion evit o c'halonakaat dindan ar jahinerezh hag ar marv ha sed a c'hoarvezas.

- War-dro 540, sant Severin bPariz, penitiour. Mennet da ren ur vuhez a arvesterezh e savas ur peniti war ribl ar Saena lec'h m'en em vodas diskibled, en o zouez sant Kloud.

- E mervent enez Vreizh (Kembre), war-dro 505, sant Paolin, abad e Caerfyrddin (Carmarthen e saozneg). Diskibl sant Ildud e voe ivez kelenner meur a sant, en o zouez sant Devi.

- Er bloaz 615, ganedigezh en neñvoù sant Koulman Veur, abad, Uheldad ar venec'h kelt. Ganet e 540 e rannvro Laighan en Iwerzhon, e voe manac'h en abatioù Clúain Inis hag e Bangor lec'h ma voe diskibl sant Komgall. Deuet da vezañ "pirc'hirin evit ar C'hrist" e treuzas Mor-Breizh war-dro 590, hag ec'h avielas biz Gallia hag ivez rannvro ar Roen. Sevel a reas abati Anagrates (Annegray), Luxovium, ha Fontenae e Burgondia o reiñ dezho ur reolenn strizh. Rediet da vont d'an harlu e treuzas an Alpoù hag e tiazegas en Emilia manati Bobbio lec'h ma varvas e peoc'h an Aotroù.

- Er VIIvet kantved, ar sent Eonog ha Eodiern, diskibled sant Koulman, deuet gantañ eus Iwerzhon da Luxovium.

- Er VIIIvet kantved, sant Cummian, manac'h, eskob e Bobbio.

- E Breizh, en IXvet kantved, sant Konzelveg pe Konzelv, manac'h, beleg, diskibl sant Konvoion e Redon, liorzhour.

D'ar 24 a viz Du

- Er bloaz 324, en Aquileia e Bro-Venezia, merzherenti sant Krizogono. Tra ma oa katekizour e Roma e voe harzet ha karc'hariet da-geñver heskinadegoù Diocletianus. Goude daou vloaz en toull-bac'h lec'h ma veze sikouret gant santez Anastazia hag en doa kelennet e voe kaset da Aquileia dirak an impalaer a roas urzh d'e zibennañ. E gorf a voe taolet er mor ha sebeliet gant ar beleg Zoilo a-raok bezañ kaset da Zadar. Darn eus e relegoù a voe kaset avat da Roma lec'h ma voe savet ur brientiliz en e enor da vare ar pab Silvestr Iañ e 324 hag e anv enskrivet el lidreizhenn roman. Gant ar C'Hresianed e vez graet anezhañ *megalomartyr* eleze "merzher meur".

- War-dro 700, santez Eanflæd, merc'h sant Edwin roue Norzumbria ha santez Ethelburg eus Kent, badezet gant sant Paolin. War-dro 642 e timezas gant Oswiu roue Beornica. Goude marv he gwaz e 670 ez eas da vanac'hez en abati Whitby, diazezet gant santez Hilda ma teuas da vezañ an abadez diwezhatoc'h anezhañ.

- E 1643, en Etiopia, santez Walatta. Hag hi ur vaouez kaer-meurbet ha leun a vadelezh, e oa dimezet gant ur maodiern eus an Negus, roue ar vro. Gant asant he gwaz avat en em dennas war ar maez en Abisinia evit sevel ur gêriadenn lec'h ma veze renet ur vuhez kumuniezhel talmet diouzh son ar c'hloc'h, gant ar bedenn, al labour, ar predoù, an ehanoù, an hun. Seizh kêriadenn a seurt-se a oa bet savet pa varvas.

- D'an hevelep deiz, ar sent Andrev DungLac, Yann-Teofan Vénard hag o c'heneiled, merzherion ar Vietnam. Gant ar gouel-mañ e eñvorer 117 merzher bet lakaet d'ar marv etre 1745 ha 1862 e ranbarzhioù Bro-Vietnam eleze an Tonkin, an Annam ha Kochinchina. En o-zouez e konter 8 eskob,

kalz beleion hag un engroez a liked, paotred ha merc'hed, a bep stad hag a bep oad o deus kavet gwell gouzañv an harlu, an toullbac'h, ar boureviadur hag en diwezh ar marv eget kerzhout war ar groaz ha dinac'hañ o feiz.

- E Breizh, er VIvet kantved, merzherenti sant Bieuzhi pe Bihui, manac'h deuet eus Kembre a hiziv, beleg, keneil sant Weltaz e Breizh. Bez' en devoa ur peniti war ribl ar Blañvezh a-blom da dorgenn Kastenneg e Bieuzhi-an-dour e Bro-Wened. Dre ma oa brudet evit e zonezon da bareañ ar chas, e teuas un aotrou, un deiz m'edo o lidañ an oferenn, o c'houlenn ma teufe diouzhtu da skarzhañ droug ar gonnar diouzh e chas. Dre ma kendalc'he gant an aberzh santel e sankas an aotrou konnaret e gleze en penn Bihui a echuas an oferenn hag en em lakaas d'ober an hent etrezek abati Rewiz lec'h ma varvas goude bezañ degemeret bennozh sant Weltaz.

- En Iwerzhon, war-dro 500, en Iwerzhon, sant Cianan (Br. Kouanan pe Kenan), eskob. Diskibl sant Varzhin war-un-dro gant sant Padrig e savas un iliz-veur e maen e Duleek e kontelezh Meath.

- En Iwerzhon, er VIvet kantved, sant Koulman Clúain Eois, eskob, barzh e Caiseal. Badezet gant sant Brendan Clúain Fearta, manac'h ha beleg, e teuas da vezañ eskob Clúain Eois e dibenn e vuhez.

D'ar 25 a viz Du

- War-dro ar bloaz 305, merzherenti santez Katell (Katarina) Aleksandria, gwerc'hez ha merzherez. Ganet e voe en Aleksandria hag abred tre e liammas he studioù war an arzoù frank gant gred ar feiz. Tizhout a reas un deskadurezh hag ur santelezh uhel, kement ha ma oa dreist an helenneion hag hi 18 bloaz hepken. Ne dermas ket da sevel rebechoù ouzh an implaer Maksimian dre ma heskine ar gristenion. Hemañ, bamet gant skiant Katell, a vodas ur strollad tud desket gant ar spi d'he lakaat da dremen eus ar feiz e Jezuz d'an idoloù. Ar c'hontrol eo a c'hoarvezas rak lod eus an dud-se a stagas gant ar feiz kristen goude bezañ selaouet Katell. Maksimian kounnaret a c'hourc'hemennas e vefe skourjezet Katell ha ma voe staget da c'houde ouzh rodoù karget a lañennoù lemmet. Hogen e voe drailhet ar benveg boureviañ, neuze e roas ar mac'homer an urzh d'he dibennañ. He c'horf a voe douget gant aeled d'ar Menez Sinai lec'h m'en doa resevet Moizez al lezenn dre berzh an aeled ha lec'h ma vez miret abaoe en un abati brudet.

- E 311, merzherenti sant Pêr Aleksandria, eskob. Goude ur vuhez santel e voe dibennet war urzh an impalaer Maksen hag e voe lazhiad diwezhañ an heskinadeg veur hag evel siell ar verzhherion. War un dro gantañ e talc'her koun eus tri eskob egiptat lazhet ivez en Aleksandria: Hesychius, Pachymius, ha Theodor.

- En Devnon (Kernev-Veur), sant Talan (pe Telent), feizvonnour.

- En Iwerzhon, VIIvet kantved, sant Gwenni (Iw. Fionnchú), abad, bet manac'h e Bangor.

D'ar 26 a viz Du

- E 399, e Roma, distro da Zoue ene sant Siris, pab. Meulet eo bet gant sant Ambroaz dre ma kelennas d'an eskibion feiz an tadoù ha ma renas an Iliz er wirionez e-kreiz an daeladennoù. Sebeliet e voe e bered santez Prisilha.

- War-dro 614, en Adrianapolis, sant Alipe ar Peuler, penitiour. Emzivad, e voe desavet gant an eskob Teodor hag e teuas da vezañ merour ha diagon iliz Adrianapolis ken en em dennañ en ul logell ha diwezhatoc'h war ur peul. Desachañ a reas kalz diskibled hag e savas evito ur manati evit menec'h hag unan all evit manac'hezed. Bevañ a reas betek 99 bloaz da vare Heraclius impalaer Bizantion.

- E 1267, sant Silvestr Gozzolini, abad Fabriano, diazezour. Goude marv ur mignon en em dennas en digenvez kent diazezañ e Monte Favo Kongregadur ar Silvestrined dindan reolenn sant Benead.

- E 1754, e Roma, e kouent Sant-Bonaventura war ar Palatino, ganedigezh en neñvoù sant Leonarzh Porzh Maoris, beleg eus urzh ar Vinored. Leuniet gant gred evit silvidigezh an eneoù en em ouestlas d'ar brezegerezh e-kerzh ouzhpenn tri c'hant mision e Roma, en hanternoz Italia hag e Korsika, da embann levrioù a zeolieg, ha da skignañ poellad Hent ar Groaz.

- E mervent enez Vreizh (Kembre), merzherenti sant Ilan, manac'h.

- En Iwerzhon, distro da Zoue sant Banvan, eskob.
- En Iwerzhon, e 706, sant Coibhdeanach, manac'h.

D'ar 27 a viz Du

- Er bloaz 388, er Friouli, distro da Zoue sant Valerien Aquileia, eskob. Difenn a reas ar feiz katolik en Illiria enep an Ariaded hag e strollas kloer ha liked evit ren ar vuhez kenvez.
- E 421, e Persia, merzherenti sant Maharsapor. Hag eñ priñs e Persia e voe harzet da geñver heskinadeg ar roue Yesdegird. Goude bezañ bet jahinet kriz e vo dalc'het er c'harc'har. Divrall en e feiz e voe kondaonet da vervel bac'het en ur foz lec'h ma voe kavet goude e varv, daoulinet en ur bedenn diwezhañ.
- E 421, e Persia, merzherenti sant Jakez an Didroc'hed. Ofiser uhel e Persia ha kristen e nac'has e feiz evit mirout grad-vad ar roue Yesdegird. Keuziet ez eas da embann e feiz dirak ar roue Varanes V mab ha warlerc'hier Yesdegird. Hemañ e lakaas da vezañ troc'het dezhañ e izili ha dibennet en diwezh.
- Er Vvet kantved, er Provensa, distro da Zoue ene sant Maksen Riez, eskob ha feizvonnour. Manac'h e Lerina e voe abad war-lerc'h sant Honorat pa voe anvet hemañ eskob Arles ha d'e dro e voe anvet eskob Riez lec'h ma lakaas da splannañ ar wirionez katolik.
- E 639, sant Akar Noyon (Lt. Acharius, Gl. Anschaire), eskob ha feizvonnour. Da gentañ manac'h e Luxovium da vare sant Eustaz, e voe dilennet eskob Noyon ha Tournai hag e voe un abostolour kalonek. Sevel a reas eskobiezh Therouanne. Harpañ a reas labour sant Amand.
- Itron-Varia ar Vedalenn Vurzhudus: Emziskouezadenn ar Werc'hez e kouent Merc'hed ar Garitez e straed ar vag-treizh e Pariz da santez Katell Laboure o c'houlenn e vefe kognet ar "vedalenn vurzhudus" a voe dasparzhet buan dre ar bed a-bezh.
- E Rusia, Itron-Varia an Arouez. Sed orin ar gouel-se: d'ar 27 a viz Du 1150, pa voe sezizet Novgorod, e lakaas he arc'heskob ikonenn Itron-Varia an Arouez war ar ramparzhioù. Ur bir a dizhas an ikonenn hag e voe goloet ar gêr gant teñvalijenn ken ma rankas an enebourion disezizañ.
- E Breizh, er VIIvet kantved, sant Jaffrez, eskob e kwent Aled-Sant-Mac'hloù.
- E Breizh, sant Inan, eskob a orin eus hanternoz enez Vreizh (Bro-Skos hiziv).
- E 1040, ganedigezh en neñvoù sant Goustan pe Gulstan, manac'h ha feizvonnour. Genidik eus Breizh-Veur e voe skrapet pa oa yaouank flamm gant preizhataerion a reas anezhañ ur c'henweller eus o laeroñsi. Dieubet goude bloavezhioù e voe diskibl sant Felis war Enez-Eusa ha da c'houde en abati Rewiz.
- En Iwerzhon, er VIvet kantved, sant Seachnall, eskob, diskibl sant Padrig.
- E hanternoz enez Vreizh (Bro-Skos diwezhatoc'h), en VIIvet kantved, sant Fergus ar Pikt, eskob e Glamis. Deuet eus Bro-Iwerzhon e voe abostol ar Bikted hag e kemeras perzh e Sened roman e 721.
- E 784, e Karintia Aostria, sant Virjil pe Feargal (Fergal, Gourgall, Lt. Virgilius). Genidik eus Bro-Iwerzhon e tremenas daou vloaz e Bro-C'hall da vare Pepin Grenn kent bezañ eskobet ha kaset da Salzburg.
- E 713, distro da Zoue santez Oda (Lt. Odetta), penitiourez e-kichen Luik e Belgia, merc'h ur roue en Iwerzhon.

D'an 28 a viz Du

- Er Iañ kantved, ganedigezh en neñvoù sant Sosten, diskibl ha keneil sant Paol hag a gomz diwar e benn en e lizher d'ar Gorintiz (1Ko1,1-3).
- Er IVre kantved, en Armenia, merzherenti sant Irenarg. Bourev a vicher e kêr Sebast, da vare an impalaer Diocletianus, e ranke andisha seizh kristenez hogen e voe gounezet d'ar feiz ha dibennet war un dro ganto.
- E 764, e Kêrgustentin, merzherenti sant Steven Yaouank, manac'h. Merzheriet e voe gant meur a vanac'h evit bezañ difennet kehelerezh an ikonennoù santel.

- E 1886 e Pariz, distro da Zoue santez Katell Laboure, leanez eus Merc'hed ar Garitez. Meur a-wezh en em ziskouezas ar Werc'hez Vari dezhi a-hed he amzer nevezia dez e kouent straed ar vag-treizh e Pariz o c'houlenn kognañ ar «vedalenn vurzhudus» gant an aspedenn d'ar Werchez en-gehentet hep pec'hed. En ospiti Enghien e varvas goude 45 bloavezh e servij ar beorion hag ar gozhidi.

- E Breizh, er VIvet kantved, santez Eodez, gwerc'hez ha merzherez, c'hoar sant Tangi. Bez' he deus bet da c'houzañv kalz a-berzh he lez-vamm a oa gonezet da dreuzkredenn Pelagius. Un deiz m'edo he breur Tangi o tistreiñ d'ar c'hastell e lavaras dezhañ al lez-vamm e oa ur vaouez dizonest eus he c'hoar. Hemañ a voe touellet-mat ha douget gant ar fulor e tic'houzougas e c'hoar.

D'an 29 a viz Du

- En IIIde kantved, merzherenti sant Sernin, eskob Tolosa. Hervez an hengoun e voe unan eus ar seizh eskob kaset gant ar pab da avielañ Gallia. Da vare heskinadeg Decius e voe harzet ha taolet eus ar c'hapitol.

- En IIIde kantved, e Bisaltia e kember an Tigr hag an Eufratez, merzherenti sant Paramon hag e dri c'hant dek keneil ha tri ugent. Dibennet e voent war urzh gouanour Nikomedia dre ma nac'hent aberzhiñ d'an douez Iziz.

- Er bloaz 305, e Roma war ar Via Salaria, da vare Dioklesianus, merzherenti sant Saturnin. Ganet e Kartaga, e voe boureviet kriz en abeg d'e feiz: staget ouzh ar marc'h-koad, dêvet gant bodoù tan ha dibennet en diwezh. War un dro gantañ e voe lazhet an diagon sant Sisinius.

- E Breizh, er VIvet kantved, sant Houarzhon, eskob e Leon, keneil sant Tenenan, kariad da sant Herve.

- E Kembre, er VIvet kantved, sant Sadwen, manac'h, breur sant Ildud, diskibl sant Kadvan.

- En Iwerzhon, e 573, sant Brendan Birr pe ar Yaouer, abad Birr. Kempredad sant Brendan an Henvedad, e voe manac'h war un dro gantañ en abati Clúain Ioráird. Bez' e voe mignon ha kuzulier sant Koulmkell.

